



BINIAOU



♩:80 Goustadig

Na meus ket ne tra eur bed nemet eur sac'hig bi maen oing oing
 oing oing oing Gant an me c'hon- ne ma boued ar festaou ar pardonioù oing, oing
 oing oing oing. Hag ean e c'houit'el ken spiz 'vel ar gleziou en Iliz o-ge, o-ge, o
 Diskan. drant
 Pô-tred yaouank, ha-ran te zuz, Ha merc'hezed ge ha joaüz 'vit ho lakat da
 drei war ar prad, meus graet ar zonen ma tra la ta ma fe la

Na m'eus ket netra eur bed
 Nemet eur sac'hig biniaou
 Gantan me c'hone ma boued
 Eur festaou ,ar pardonioù
 Hag ean e c'houit'el ken spiz
 'Vel orgleziou en Iliz.

Zul ha gouel hag dalc'hmad
 El lanneg melkonius
 Ha blij din-me c'houit'elad
 Gant ma Biniaou dudius
 Hag an ewned ar bodaou
 A chilaou ma zonenau.

Ar merc'hied eus ma c'hartier
 Na n'ant ket da gousperaou
 Da zul d'ender eur leur ger
 Pa c'houe an bars ma biniaou
 Lies me a gost d'ehon
 Tabut gant n'Otraou Person.

DISKAN

Pô-tred yaouank karantezus
 Ha merc'hezged gê ha joaüz
 'Vit ho lakat
 Da drei war ar prad
 Meus graet eur zonen ma, Tra la la

Enouac'h e c'hon devot bras
 D'an oll zent ha da Werc'hez
 Kristen on, kristen digras
 Ha pedi 'ran alies
 Rag me zon an Anjelus
 War ma biniaou aketus

Ha pa vin me tremenet
 N' ankouaet ket bugale
 Ma biniaou seiennet
 Laket 'an dindan ma skoë
 Rag sur am bo diouer
 Anezan ar Purgatoer.

Efflam koet skau (Barz d'ariorig)